

D'ar 5 a viz Ebrel

- E 305, e Tesalonikê e Makedonia, da vare heskinadeg Diocletianus, merzherenti **santez Irena**, gwerc'hez.

Dre m'he doa kuzhet levrioù santel ha ma nac'he aberzhiñ d'an idolennoù e voe diskouezet en noazh en ti gasterezh ha taolet en ur c'horadenn war urzh ar prefed Dulcetius en doe lazhet endeo he div c'hoar Agape ha Kionia.

- Deizlid **Merzherion Persia**, lakaet d'ar marv e 344 e Seleukia Mezopotamia, anezho 111 gwaz ha 9 maouez.

Dre ma nac'hent azeuliñ an heol e voe karc'hariet beleion, diagoned ha gwerc'hezed kensakret, war urzh ar roue Sapor II, e toullou-bac'h lous hag hep sklêrijenn e-kerzh c'hwec'h miz. Neuze e voent dibennet tra ma veze taolet kristenion-all en tan.

- E 647, e Bro-Saoz, ganedigezh en neñvoù **santez Ethelburg**, abadez.

Hag hi merc'h Ethelbert, tiern Kent, gwreg sant Edwin, tiern merzher Norzumbria. Intañvezet e savas ul leandi e Lyminge e Kent.

- E 1258, distro da Zoue ene **santez Juluana Menez Kornilhon**, gwerc'hez.

Leanez Sant-Eosten, prioiez manati Menez Kornilhon en eskobiezh Luik marvet penitiouez e Fosses er Brabant, e labouras evit diazezañ gouel ar C'horpus Christi pe gouel ar Sakramant.

- E Breizh, **sant Kalanel**, kehelet er barrez a zoug e anv, Kalanel, gwezhall trev eus Pluskelleg e Kernev.

- E Kernev-Veur, **sant Probus ha santez Grasia** e wreg, feizvonnourion.

- E 1669, **ar bac'hiadez Mari a Sant Jozef, Marie Menard** eus he anv plac'h yaouank, leanez.

Bez' e voe superioez kouent Beneadezed ar C'halvar e Sant-Sir Roazhon, kevrinouez. He zad a oa an den a lezenn santel ha gouiziek Klaoda Ménard.

- E 1419, e Gwened : tremenvan sant Visant Ferrer a vez lidet d'ar 5 a viz Mae.

D'ar 6 a viz Ebrel

- War-dro 305, e Sirmium e Pannonia (hiziv Mitrovica en Hungaria), merzherenti **sant Ireneos**, eskob ha merzher.

Da vare heskinadeg an impalaer Maximianus ha dindan ar prefed Probus e tiwaskas ar jahinirezh hag e c'houzañvas e-pad pell en toullbac'h betek bezañ dibennet.

- E 582, **sant Eutikez**, henaour Kêrgustentin.

Eskob, e kadorias eil goursenez kedilizel Kêrgustentin hag e stourmas evit ar feiz reizhwir. Harluet e-pad pemzek bloaz war urzh an impalaer Justinianus e varvas pevar bloaz goude e zistro war ar gador-veur henaourel.

- E 861, **sant Prudentius**, eskob Kêr-dTricasses (hiziv Troyes).

Difenn a reas kelennadurezh ar c'hras, a savas un diverrañ eus ar salmaoueg evit ar valeerion, un dastumadenn pennadoù eus ar Bibl evit an danvez beleion, hag e reizhas ar manatioù.

- E 912, en abati Sant-Gall en Helvetia, **sant Nokter ar Besteod**, feizvonnour.

Gwan en e gorf met lemm e spered e voe troet a-grenn davet madoù an neñv. Donezonet kaer a-fet barzhoniezh ha sonerezh e savas e-leizh a bezhioù liderezhel.

- E 1221, e Seveso e-kichen Milano, merzherenti **sant Pietro Verona**, dominigad. Ganet en un tiegezh a vrientinion gonezet d'ar vanikeegezh e tegemeras sae ar vreudeur brezegenerion eus daouarn sant Dominig. Gant gred e tizarbennas an disivoudoù. War an hent etre Cosma ha Milano e voe taget gant Carino da Balsamo a zeuas diwezhatoc'h da vezañ dominigad. A-raok mervel en devoe amzer da skrivañ deroù ar Greco gant e wad.
- E 885, e Velehrad e Moravia, ganedigezh en neñvoù sant Metodios a vez lidet war un dro gant e vreur Kurillos d'ar 14 a viz C'hwevrer.
- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Brec'h**an, eskob.
- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Kadu** (Iw. Cathdubh), eskob.
- E Breizh, e 1614, distro da Zoue ene **ar pac'hiad Valentin a Naoned**, kabusin.

D'ar 7 a viz Ebrel

- E 180, e Roma, **sant Hegesippus**, skrivagner. Hervez Euzeb Kaezarea, e oa genidik eus Palestina ha goude bezañ bet gounezet d'ar feiz, e teuas da Roma, da vare ar pab Anised, hag e chomas betek mare ar pab Eleuter, war-dro 180. Sevel a reas un istor eus an Iliz adalek Gouzañvidigezh ar Salver.
- E 304, e Pompeiopolis e Silisia, merzherenti **sant Kaliob** (Gl. Calliope). Hag eñ eus un tiegezh senedourion e nac'has kemer perzh en dirolladegoù aozet gant prefed an impalaer evit enoriñ an doueoù. Harzet e voe, skourjezet ha staget ouzh ar marc'h-koad a-us d'an tan ha dre ma chome feal d'ar C'hrist e voe kroastaget d'ar Gwener Santel.
- E 888, merzherenti **sant Gibard** (Gl. Gilbert), abad Luxovium (Luxeuil) ha merzher. Lakaet e voe d'ar marv gant barbared war un dro gant e genvreudeur dre ma tiferent nac'hañ o feiz hag o galvidigezh.
- E 1719, e Rouen e Bro-C'hall, distro da Zoue ene **sant Yann-Vadezour ar Sal**, beleg, diazezour Breudeur ar Skolioù Kristen. Hag eñ beleg eus eskobiezh Reims e c'hêr c'henidik en em ouestlas da zegas deskadurezh d'ar vugale e skolioù digoust hag e tiazegas kumuniezh ar vreudeur evit ober war o zro. Goude dezhañ bezañ gouzañvet didrouz kalz trubarderezhioù ha falstamallerezhioù e varvas d'ar Gwener Santel.
- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er V^{vet} kantved, **sant Brenac'h**, Iwezhonad, penitiour e Penvro.
- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Gournezh ha Louvelen pe Belen**, penitiourion en enez Enlli.
- En Devnon (Kernev-Veur), er VI^{vet} kantved, **sant Gouron pe Goran**, beleg penitiour e Bodmeneghy (Bodmin). E beniti a voe annezet war e lerc'h gant sant Neod.
- En Iwerzhon, VI^{vet} kantved, **sant Fionnan** (*Guennan*), lesanvet *Kamm*, abad, diskibl sant Brendan e Clúain Fearta.

- En Iwerzhon, e 685, **sant Rozin** (Iw. Roisín), manac'h e Corcaigh.

D'an 8 a viz Ebrel

- Er I^{añ} kantved, **sant Agabus**, diouganer meneget e levr Oberoù an Ebestel. Deuet eus Jeruzalem da Antiokeia e tiouganas un naonegezh vras (s.o. Ob 11 27-28) hag e kemennas da sant Paol e vefe gwerzhet gant ar Yuzevion d'ar Baganed (*ibid.* 21, 10-11).

- E 265, **sant Denez Aleksandria**, eskob ha feizvonnour. Leun a skiant e rankas difenn ar feiz e-kreiz an heskinadurioù hag an disivoudoù. Den a helennegezh uhel e eskemmas lizhiri gant ar pab sant Denez a-zivout doueelezh ar C'Hrist. Dibleg en e feiz e-kreiz an disivoudoù ne dermas ket da c'hourbann ha da zifenn ar feiz daoust d'an eneberezh, d'ar poanioù ha d'an heskinadurioù da vare an impalaered Decius, Valerianus ha Galianus. War un dro gantañ e reer eñvor eus e ziskibled ar **sent Faustus, Caius, Petrus, Paulus, Eusebius, Cheremonus, Lucius ha daou all**, o devoe da c'houzañv heskinadurioù liesseurt. Faustus a c'houezas zoken palmezenn ar verzherion da vare heskinadeg Diocletianus.

- War-dro 1095, e Bro-C'hall, **sant Gwalder** (Gl. Gautier), abad. Ganet e Andainville e Pikardia, e tiazezas abati Sant-Varzhin e Pontoise.

- E 1300, **ar wenvidigez Koñstensia**, rouanez Aragon, mamm santez Elizabed Portugal. E Baradoz Dante e vez graet anezhi "Koñstensia vat".

- E 1816, **santez Julia Billard**, diazevourez C'Hoarezed an Itron-Varia, ur c'hengregadur kelennerezed e Amiens ha Namur. Genidik eus eskobiezh Beauvais e Bro-C'hall e voe seizhet adalek he zri bloaz warn-ugent e-korf meur a vloavezh. Ur wezh pareet en em ouestlas d'ober war-dro deskadurezh ar merc'hed yaouank hag e tiazezas ur gumuniezh a yeas buan da Namurs, en izelvroioù hag e Bro-Alamagn.

- En Iwerzhon, e 705, **sant Ceannfhealadh**, manac'h e Bangor.

- E Breizh, er XVII^{vet} kantved, **ar pac'hiad Josef Garreau**, manac'h trapat.

D'an 9 a viz Ebrel

- E 306, en Aleksandria, da vare Maximianus Daia, breur Apphianos merzherenti **sant Eidez** pe **Aedesius** (Gl. Édèse),.

Anavezet evit e ouiziegezh, e enebas ouzh ar gouarnour a wallgase ar gwerc'hezded kensakret. Neuze e voe harzet, jahinet ha taolet er mor en abeg d'ar C'hrist Jezuz.

- Er IV^{re} kantved, da vare Diocletianus, e Sirmium e Pannonia, merzherenti **sant Demetrius**, diagon.

Anvet *megalomerzher* dre ma'z eo ar brudetañ milour merzher er Reter.

- E 688, e Bro-Hannonia (Hainaut), **santez Gwaltrud** (pe Waudru), abadez, c'hoar santez Adalgond.

Dimezet gant sant Visant pe Madelgaer, ha goude bezañ desavet o fevar bugel, Landry, Dentelin, Adeltrud ha Matelbert hag a zo holl war roll ar sent, ez eas da vanac'hez e manati Châteaulieu, a zo penn-kentañ kêr-vMoñs, lec'h ma voe abadez.

- E 730, distro da Zoue ene **sant Hugues**, eskob Rotomagos (Rouen) a varvas e manati Jumièges en doa renet war un dro gant hini Fontenelle.

- E Breizh, **santez Merzherian**, gwerc'hez.

- Er IV^{re} kantved, **sant Meldrog**, Iwerzhonad, eskob Gwened.

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er V^{vet} kantved, **santez Maerun**, maouez santel, merc'h Gwerzhvir an tiern.

- E Bro-Skos, **sant Dotto**, abad en inizi Erc'h.

D'an 10 a viz Ebrel

- E 1028, e Bro-C'hall, **sant Fulberzh**, eskob Chartrez, doueonour gouezieg, sonour ha meulganour.

Diazezañ a reas ur skol vrudet lec'h ma voe stummet kalz a yaouankizoù, en o zouez mab ar roue Hugues Capet a Vro-C'Hall. Reiñ a reas lañs da adsavidigezh an iliz-veur goude tangwall 1020.

- **C'hwec'h mil Merzherion Georgia**, lakaet d'ar marv e 1615 e gouelec'h David Garesja.

O welout lidkerzh ar venec'h tro-dro da iliz an Dasorc'h da zeiz Pask Abas I^{añ}, Shah Persia, a roas urzh d'o lazhañ holl ha da zistrujañ an daouzek manati a oa eno.

- E Breizh, er I^{añ} kantved, **sant Adeodat**, diagon diskibl sant Klaer hag a voe eskob kentañ Naoned.

D'an 11 a viz Ebrel

- Er I^{añ} kantved, merzherenti **sant Antipaz Pergamos**, lakaet d'ar marv abalamour da anv Jezuz, liz da sant Yann e levr an Diskuliadur (2,12-13).

- Er I^{añ} kantved, distro da Zoue ene **sant Domnion**, eskob Salone e Dalmasia (hiziv Kroatia).

Hervez an hengoun e oa eus strollad ar Seikont Diskibl hag e voe kaset gant sant Pêr e unan da aviolañ Dalmasia. Hervez lod all avat en dije bevet er IV^{re} kantved.

- E 714, e Bro-Saoz, **sant Guthlag**, penitiour.

Ur forban e oa hag a leze koulskoude bepred un drederenn eus o madoù gant ar rae a ziorble.

Gonezet da Zoue d'e bevar bloaz warn-ugent ez eas da benitiour war un enezenn eus aber ar Wash lec'h ma varvas hag a zeuas da vezañ abati Crowland.

- E 1079, e Polonia, merzherenti **sant Stanislaz**, eskob Krakovia.

E-kreiz freuzioù e amzer e voe difennour didrec'hus ar sevenadur hag ar vuhezgezh kristen hag e renas e iliz evel ur pastor mat evezhieki ouzh ar beorion ha feal da weladenniñ bep bloaz e c'hloer. Lazhet e voe p'edo o lidañ an oferenn gant ar roue Boleslaz m'en doa rebechet outañ e wallvuhez.

- E 1903, e Lucca e Toskana, **santez Gemma Galgani**, gwerc'hez.

Heverk evit he arvesterezh eus Pasion ar Salver hag evit he habaskted o c'houzañv ar poanioù a ziwaskas e echuas he buhez ael d'an oad a bemp bloaz warn-ugent.

- E 1961, e Ban Na Thoum el Laos, merzherenti **ar gwenvidig Visant an Enored**, beleg eus Obladed Mari-Dinamm, genidik eus Pont-'n-Abad ar Vro-Vigoudenn. Ganet d'an 12 a viz Meurzh 1921, e voe gwenvidikaet d'an 11 a viz Kerzu 2016 gant 16 merzher all eus al Laos.

